

# KANTIK SANT IANN AR BIZ

Ton : *Rumengol pe Lambader*

## DISKAN

Sant Iann, hor Patron evuruz,  
 Profed, Merzer, Kannad Jezuz,  
 Goulennit deomp digant Doue,  
 Iec'hed ar c'horf hag ann ene.

- i. <sup>1</sup> Abaoue m'eo krouet ar bed,  
 Biskoaz — nann — biskoaz n'euz guelet  
 Den ebed par deoc'h-u, Sant Iann :  
 Jezuz hel lavar he unan.
- ii. Iaouankik-flamm, el leac'hiou gouez,  
 Ez oc'h kaset gant ann Elez ;  
 Na c'houi ' zo pur korf hag ene,  
 Pell dioc'h ann dud, tost da Zoue !
- iii. Na kalet eo ho pinijenn,  
 Kroc'henn eul loan enn ho kerc'henn !  
 Morse na guin na tamm bara ;  
 Griziuo c'huero evit beva !...
- iv. <sup>2</sup> Displega 'rit lezenn Doue ;  
 Splann e tiskuezit hent ann Ee :  
 'Vit gounit kalon ar pec'her  
 Ho prezegennou ' vo pounner :
- v. « Ar vouc'hal ' zo harp er vezenn,  
 A livirit d'ar bec'herien :  
 » Ma taleit da jench buez  
 » Doue ho skoio didruez. »

17  
 Imité de  
 M<sup>r</sup> Guillo  
 Strophes  
 entières empruntées

- VI. Ken huel e savit ho mouez,  
Ma tregern traonienn ha menez ;  
Kals tud a zeu bete 'r Jourdin  
O skei gant keuz var ho feultrin.
- VII. Dont ' ra ive Salver ar bed  
Da c'houlenn beza badezet ;  
Perag krena, Iann Vadezour ?  
Var benn Jezuz skuillit ann dour.
- VIII. Ma krenit dirag Mestr ar bed,  
Dirag ann dud ne grênfoc'h ket ;  
C'houi lavaro ar virionez  
Heb aoun... zoken da Herodez :
- IX. « Silaou, Herodez, te ra fall  
» Derc'hel ganez pried eunn all :  
» Varn-hot, varn-hi hag heb dale  
» E pouezo dourn justis Doue. »
- X. Eur c'hreg gant he merc'h danserez  
A reaz deoc'h koll ho puez ;  
Malloz d'ann dans ha d'ar visou  
Goad hag Ifern ouz ho zeuliou !
- XI. Ho penn zantel ' zo digaset  
Var eur plad, e kreiz ar banked ;  
Sell mad out-han, Herodez kriz,  
Da vourreo e vezo noz-deiz.
- XII. Pebez buez, buez Sant Iann !  
Ra vezo buez peb unan !  
Pinienn hag humilite  
A gas ar c'hristen da Zoue.
- XIII. Kemeromp Sant Iann evit skuer :  
Bezomp bepred tud a zever :  
Guelloc'h eo senti ouz Doue  
Eget sklabeza hon ene.

- xiv. 'Vit hoc'h enori, o Sant braz,  
Euz savet, tostik d'ar mor glaz,  
Eun tour kaer ha kaeroc'h Iliz :  
Piou n'anavez Sant Iann ar Biz ?
- xv. Deuet ann hanv ne veler ken  
Bemdez nemed pardonerien  
O vont var zu Sant-Iann-ar-Biz ;  
Koanta korn douar ' zo e Breiz.
- xvi. Epad daou zervez ar pardon,  
Hag a dud euz kostez Leon,  
Euz Guengam, Lannuon, Kemper,  
A gemer hent Sant Iann Dreger !!
- xvii. Kals anezho ' zo diare'henn,  
Divoutou, dizolo ho fenn ;  
Lod all ' zo e korf ho roched,  
Ho dourn krog enn ho japeled.
- xviii. Skuiz ez 'dont da eva dour  
D'ho feunteun, Sant Iann Vadezour ;  
Dour ho feunteun ' dorr ar sec'hed  
Ha d'ann izili ' ro iec'hed.
- xix. Kent antreal enn hoc'h Iliz  
Teir zro dezhi ' reont gant feiz ;  
Sur int da reseo goude-ze  
Grasou puilloc'h digant Doue.
- xx. Setu hi brema daoulinet  
Dirag hoc'h aoter benniget :  
Eur beleg gant he zoupiliz  
Ouz peb lagad a douch ho *Piz*.
- xxi. Gant ar Biz-se, o Sant euruz,  
C'houi ' ziskouezaz eun deiz Jezuz  
En eur lavaret : « Pec'herien,  
\* » Ahont 'ma Oan Doue ! Grit pinijenn !!

- XXII. Pa laker var ho daoulagad  
Ho Piz Santel, o Patron mad,  
E c'houlenn ar bardonerien  
Evit ho c'horf ar sklerijenn.
- XXIII. Dreist peb tra goulennit neuze,  
Tud keiz, sklerijenn ann eue ;  
Gouzout a reot n'euz drouk ebed  
Spontussoc'h eget ar pec'hed,
- XXIV. Dioc'h ar pec'hed bezit donjer,  
Stourmit out-han e peb amzer ;  
O veva e gras vad Jezuz  
C'houi ' vezo, a dra zur, euruz.
- XXV. Pardonerien euz a bep bro,  
Da Zoue dalc'hit mad ato ;  
Dalc'hit stard d'he Iliz Santel :  
Gant-se pegen dous eo mervel !
- XXVI. Skuillit bennoz var bep-hini  
'Zeu ama, Sant Iann, d'ho pedi :  
Hed ho buez, var ho maro,  
Kemerit soursi anezho.
- XXVII. En eur vont hirio d'ann tantad  
Ni ho pedo a galon vad  
D'hon diwoal dioc'h ann tân skrijuz  
Ha d'hor c'has da velet Jezuz.

*M. Léon, Recteur de Cléder.*  
*originnaire de Jean-du-Loiret*

IMPRIMATUR : Quimper, le 16 Mai 1900.  
F. CORRIGOU,  
Vic. Gen.